

1

Disoursi e vleine ar c'homiser Kaou Kemener e garr-tan, d'ar Meurzh-se a greiz miz Gouere, war an hent a gase da Wengamp. Tost da unnek eur vintin e oa. Edo o paouez kuitaat Karaez-Plougêr. Da Lannuon e oa o vont, e-lec'h ma oa o chom, e karter Keruhel, gant Loeiza Larnikol, e wreg. A Geriti-Penmarc'h, er Vro-Vigoudenn, e oant genidik o-daou. Cheñchamantoù bras a oa em gavet e buhez ar c'houblad, tri bloaz a oa. Goude bezañ bet, abaoe e zimeziñ gant Loeiza, war e vicher a gomiser-polis e-pad pemzek vloaz e Brest, ne oa ket mui Kaou e penn ur c'homiserdi. Anvet e oa bet da gomandant. Labourat a rae bremañ gant ur skouadrenn boliserien arbennikaet war ar vicher kas enklaskoù diwar-benn labour lous sponterien 'oa, metoù an islamisted, pe tud all eus o c'houch.

N'eo ket skouerioù a vanke eus an taolioù-feulster, graet abaoe pemp pe c'hwec'h vloaz, gant djihadisted Daesh, anezho soudarded ar Stad islamour, anvet c'hoazh kalifelezh, a faote d'an islamisted sevel e Bro-Irak ha Bro-Siria. War roll ar gwalldaolioù-se e c'helled menegiñ : muntroù e kêrioù Tolosa ha Montauban, lazhadegoù, e Pariz e burevioù ar gelaouenn *Charlie Hebdo* hag e sal-

arvestoù ar Bataclan, pe c'hoazh en ur stal kasher yuzev, hep disoñjal lazhadegoù ar 14 a viz Gouere e kêr Nisa. Ha nag a bet all a daolioù-fall c'hoazh !

E berr gomzoù, e labour e ar c'homandant Kaou Kemener gant servijoù ar Surentez-stad dindan renerezh Ministrerezh an diabarzh. Div wech ar miz e ouie Kaou mont da brefeti Roazhon, e-lec'h ma kemere perzh e bodadegoù poliserien a labour e war ar memes tachenn hag eñ. O fal a oa sevel raktres an enklaskoù a vije renet e kement lec'h ma veze manifestadegoù, bodadegoù foran, foarioù bras, festivalioù, emgavioù sport, emvodoù a bep seurt. Ul labour kuzh e oa. Ret e oa dastum titourioù, o gwiriekat, o dielfennañ. Ret e oa bezañ war evezh atav, furchal dizehan, steuñviñ rouedadoù kenlabourerien, didrouz anezho, met gouest da ziskuliañ d'ar boliserien anv neb piv bennak e vije poent bras e lakaat dindan evezh ar polis abalamour d'e emzalc'h, d'e zarempredoù pe d'an trafik a ouie ober gant broioù estren. War un doare micher c'hoari-louarn eo e pleustre Kaou Kemener abaoe tri bloaz. O redek e veze dre Breizh a-bezh. Ne gouske ket mui bemdez er gêr. War gantren e veze bepred, evel ur c'hi-chase war roud ar c'had.

Ar pevar devezh diwezhañ, eus ar Yaou da noz betek al Lun da noz, a oa bet paseet gantañ e Karaez, war tachenn Kerampuilh, e-touez engroez ar yaouankizoù deuet da festival an Erer kozh. Feurmet e oa bet kambroù, evitañ hag e skipailh, e leti ar Briñsez Ahez. Didrubuilh e oa paseet ar pevar devezh-se. Aet abadennoù ar festival war o flaen, petra bennak ma oa bet harzet ha kaset d'ar bidouf, gant archerien Karaez, lakepoded zo a ouie mont re bell war o zrafik butun drol. E miz Eost a zeu, e rankfe Kaou bezañ en Oriant. Labour sof-kont a oa en gortoz eno

evitañ gant ar festival etrekeltiek, dreist-holl dre ma veze bagadoù sonerien, dañserien hag arvesterien eus meur a vro o tont d'an Oriant bep bloaz. Met arabat mont d'ober biloù gant ar festival-se a-barzh na vije deuet ar mare, a soñje Kaou en ur vleinañ e garr.

D'an dibenn-sizhun a zeu, d'ar Sadorn ha d'ar Sul, e oa tonket dezhañ bezañ e parrez ar C'hozhvarc'had, anvet ar C'houerc'had gant tud ar vro, e-kichen Plouared, un ugent kilometr diouzh Lannuon. Urzh a oa bet kaset dezhañ, gant prefeti Roazhon, da vont di d'ober e vicher e-pad an daou zevezh ma pade pardon relijiel chapel ar Seizh Sant. War domani kumun ar C'houerc'had eo emañ kêriadenn ar Seizh Sant hag he chapel. D'ar pevare Sul a viz Gouere, tro-dro da ouel Maria Magdalena, eo e vez lidet bep bloaz ar pardon-se. Met ur pardon ispisial eo, hep e bar e Breizh, dre ma vez eno emgavioù, da-geñver al lidoù, etre kristenien ha muzulmaned. Koulskoude, ne oa ket Kaou chalet gant kement-se. Laouen, ouzhpenn, en em sante o vont rak gouzout a ouie ervat e vije degemeret ha lojet er presbital gant mestr bras ar pardon, ar Chaloni Tin Nedeleg, person ar C'houerc'had, un eontr da Gaou peogwir e oa breur d'e vamm ha bigouter eveltañ, penn-kil-ha-troad. Pellgomzet en doa dija d'ar Chaloni Nedeleg, o kemenn dezhañ e vije ar bloaz-mañ e niz er pardon gant e wreg Loeiza.

Ur sell prim a daolas Kaou ouzh eurier e garr. Unnek eur ha kard e oa. Mall a oa gantañ erruout e Lannuon. Dre m'en doa labouret e-pad an dibenn-sizhun, en doa bet koñje da chom er gêr d'ar Meurzh ha d'ar Merc'her. E wreg Loeiza, kelennerez ma oa-hi war ar brezhoneg, a oa bet anvet, daou vloaz zo, da vestrez-skol e Lannuon, setu di eo e oa deuet ar c'houblad da annezhañ. O vezañ

ma oa mare ehan-skol an hañv, he doa Lociza pedet ur c'houblad all da zont d'o gweladenniñ ha da leinañ ganto d'ar Meurzh-se dres. Plijadur a rafe da Gaou kendivizout ouzh taol gant e gamalad kozh Ronan Riou hag e wreg Katell. Poliser war e leve e oa Ronan. Labourat en doa graet gant Kaou, evel e gentañ letanant ha skoazeller, e-pad daouzek vloaz e komiserdi Brest. Barrek-tre e oa Ronan war e vicher poliser ken e oa bet lesanvet “al Louarn”. Paotr Menez-Are e oa-eñ, genidik a Vrenniliz. Pilhaouerien a oa bet eus e dud-kozh. Pa 'n doa disterniet diouzh ar vicher a bolis, paket gentañ e dri-ugent vloaz, ez eas Ronan da chom gant Katell e Montroulez. Liammoù start a vignoniezh a oa etre an daou goublad. Tad-paeron da Erwan, mab henañ Kaou ha Katell, e oa Ronan Riou.

Unnek eur hanter e oa pa dremenas Kaou a-live gant bourk Kallag. Neuze eo e reas prim e soñj da zilezel hent Gwengamp ha da vont, war-eeun, penn en norzh, gant an hent a gasfe anezhañ dre vourkioù Kalanel, Logivi-Plougraz, Plouared ha Ploubêr, betek Lannuon. Daoust ma 'z afe goustadikoc'h, berraet e vefe an hent memes-tra.

Da greisteiz-rik ec'h errue dirak e di, e karter Keruhel. Merzout a reas e oa karr Ronan Riou parket sko ouzh moger al liorzh. « Setu emaint degouezhet, mat ar jeu neuze, » a lavaras Kaou outañ e-unan en ur lazhañ keflusker e garr-tan.

2

— Hag e oac’h, tudoù ! a daolas Kaou diwar treuzoù sal-degemer e di ma oa ar re Riou ha Loeiza enni o kontañ kaoz, didrouz.

— Ac’hanta, Mabig ! N’out ket kollet e Bro-Dreger c’hoazh ? a respontas ar Riou.

Gant al lesanv “Mabig” eo ez ae Ronan ouzh e gamalad Kaou, ur voazamant a oa bet dalc’het gantañ abaoe ar mare ma oant o labourat asambles e komiserdi Brest. Ha Kaou ha mont d’e geneil en-dro :

— Ur bigouter a oar en em ober ouzh pep lec’h, al Louarn. Me a grede din az poa desket an dra-se diganin abaoe pell zo. Met, evit mont penn-da-benn gant ar wirionez, e rankan anzav n’eus ket er bed krouet kaeroc’h bro eget hini ar Vigouterien.

— Arabat dit kouezhañ e pec’hed an orgouilh memes-tra, Kaou, a blantas outañ Katell Riou war he chichantañ mousc’hoarzh.

Ha briatadoù da-heul. Tro Loeiza, mestrez an ti, e oa da gemer penn ar jeu. Setu hi ha kemenn :

— N’eo ket tout chom amañ da skuilhañ dourc’hwezh-vat ar gourc’hemenoù an eil re war ar re all. Ne faot ket din e vefe suilhet war an tan ar boued am eus

aozet deoc'h. Ouzh taol, mar plij ganeoc'h, ma vo kroget gant ur banne digor-kalon hag amzer a-walc'h hor bo da gendivizout. Te, Kaou, ro da bep hini e blas hervez ma oa bet divizet ganeomp.

Ur pred a-feson he doa aozet Loeiza. Da gentañ meuz e oa degaset war an daol ur pezh mell pladad grilhedaerzh. Dilugerniñ a rae Ronan ouzh ar pladad-se, tra ma tiskare Kaou ur banne gwin Riesling da bep hini. Ne oa ket al Louarn evit moustrañ war e c'hoant-gouzout. Setu eñ da Loeiza :

— Kavet e vez grilhedaerzh bev-buhezek da breñañ, d'ul Lun vintin, e kreiz-kêr Lannuon, Loeiza ?

— Te 'oar ne vez ket, 'vat, Ronan. Ar re-se a zo erruet amañ disadorn, fresk-bouilh, degaset eus ar Gelveneg, gant ma mab Erwan.

— Erwan ! a c'houlennas Katell. Petra e teu mab an ti da vezañ, Loeiza ?

— Ur bouilh paotr a driwec'h vloaz bremañ. Da soudard, e-barzh ar morlu, e fell dezhañ mont er bloaz a zeu. Gweladenniñ broioù, na petra 'ta. Da viz Eost, en deus lakaet en e benn mont d'ober, gant e gamaladed, un droiad teir sizhun e Bro-Spagn. Met gant peseurt moneiz Katell ? Poent eo dezhañ gouzout talvoudegezh an arc'hant. Setu en deus kavet Erwan labour e-pad miz Gouere e stal ur marc'hadour pesked eus ar Gelveneg. Bod a vez roet dezhañ gant e vamm-gozh Penmarc'h, c'hwec'h kilometr eus ar Gelveneg. E varc'h-houarn a zo aet gantañ.

— Un dra vat eo se da'm filhor, Loeiza, a lâras Ronan Riou diwar c'hoarzhin. Pep hini a oar ne stag ket ar Vigouterien o chas gant silzig. N'eo ket gwir ?

— Bez' e c'hellez ober goap, Ronan ! Du-mañ, er Vro-

Vigoudenn, ne vez ket drouzivet arc’hant evit netra. Ha me ’lâr dit, mar bije bet ur bigouter e penn Ministrerezh an arc’hant-bras, e Pariz, ne vije ket Bro-Frañs oc’h ober freuz-stal evel ma ra. Ha bremañ, plantit gant ar grillhed-traezh, mignoned.

Eus ar c’hentañ e oa ar grillhed-traezh hag ar gwin Riesling, ken e chome digomz ar gouvidi. Da eil meuz he doa Loeiza aozet un dob boultouz, ha bet degaset ar re-mañ ivez gant ar mab Erwan sur a-walc’h. N’eus ket da lârou, a soñje Ronan dioutañ e-unan, gwad bigouter a zo ivez dindan ivinoù ar mab.

Gant Kaou eo e voe adlañset ar gaoz :

— Lâr din ’ta, Ronan. Penaos emañ kont e Montroulez ?

— Derc’hel da vont, Kaou, petra ’ri ? Nemet chalet e vezomp muioc’h-mui gant dic’hlannoù dour ar porzh war ar c’haeoù. Beuzet e vez traoñ kêr bep taol ma vez reverzhi vras. Hag emamp o chom e straed Tristan Corbière, deus kostez kae Treger.

— Setu kudenn tommadur an hin, Ronan. Lazhañ an tan-gwall a c’heller ober c’hoazh, met n’eus tra da ober evit herzel ouzh ar mor a zont da laez. Labour an aezhennoù efed ti-gwer eo dre ma lakaont ar gwrezverk da greskiñ, gant teuzadur ar morskorneg o vont da-heul. Gouez da skiantourien zo, mar ne c’hellomp ket herzel ouzh an efedoù-se, e c’hellfe ar gwrezverk kreskiñ eus 2 da 5 derez ha live ar meurvorioù sevel dreistmuzul a-benn fin ar c’hantved.

— Gouzout a ran, Kaou. Ha teuler a ra ar skiantourien-se ar brall war an doare produiñ greantel hag an diorren armerzhel a vez o ren, ken e vez graet fae war ezhommoù an natur ha reolennoù an ekologiezh. Gant doujañ ouzh

mont en-dro an diorren padus e vefemp, sañset, da vezañ saveteet.

Loeiza, hag a oa o tistaliañ ar pladoù war-lerc'h ar grillhed-traezh, a lammas kerkent er gaoz, an ekologourez anezhi :

— Ha pregit deomp, gwazed ! Skiantourien, politikerien ha diorren padus, ichê ! Abaoe ar c'heit ma vez politikerien, skiantourien hag all, o terc'hel kuzuliadegoù diwar-benn tommadur an hin, n'int ket deuet a-benn da wall dra c'hoazh. Soñjit 'ta ! Ar c'hentañ kuzuliadeg a oa bet dalc'het e Rio e 1992. Bez' ez eus bet da c'houde kuzuliadegoù e Berlin, Geneva, Kyoto, Montreal, Kopenhagen (ar c'h/Cop 15) hag a oa bet ur c'hwitadenn vras, e 2009. Dont a ra din soñj c'hoazh eus kuzuliadeg Mec'hiko e 2010, hag eus hini Pariz (ar c'h/Cop 21) e 2015. Netra vat. Setu e c'hellez chom da lârou, Kaou Kemener.

— Arabat deoc'h mont war ho marc'h bihan e-giz-se, Loeiza. Gouzout a rit ne vez graet netra diwar ur bramm. Skiantourien eo a vez ouzh ar stern. Kinniget ez eus bet disoc'hoù ganto dija. Hag er mare-mañ dres, e vez ouzhpenn 180 kannad eus ar bed-holl o terc'hel kuzuliadeg e kêr Geneva en-dro. Mont a ra al labour war-raok, memestra.

— Ma ! Ha klevout a rit hemañ, tudoù. Ne ouzon ket, me, peseurt disentez a zeuio gant kuzuliadeg Geneva. Met, hervez ar pezh a vez klevet, mar kendalc'h an traoù da vont evel-se, e ranko, a-benn un tregont vloaz bennak, broioù an norzh degemerout etre 200 ha 300 milion a dud, eus broioù ar su, tonket dezho kuitaat douar o broioù genidik deuet da vezañ digevannezus gant kemmadur an hin. Ha prest e vimp-ni da roiñ bod da repuidi an hin ? Hag hep mont da glask ken pell-se, pa soñjan-me er Vro-

Vigoudenn, e choman mantret-mik o welout penaos e vez krignet dizehan an erinoù gant ar mor. Hiziv an deiz, me 'laka, ne vije ket Jakez Riou evit klozañ, evel m'en doa graet tost da gant vloaz zo, unan eus e zanevelloù, *Mona* an titl anezhi, gant an disklêriadur-mañ : « *N'eus kemm ebet er vro* ». Pa embanne Youenn Drezen, en e romant, *Itron Varia Garmez*, e vije lonket douaroù izel ar Vro-Vigoudenn gant tarzhoù didruez ar Meurvor Atlantel o sevel, m'en dare ha ne oa ket ar gwir gantañ. Kredit ac'hanon, mojenn liñvadenn kêr villiget Iz, hervez m'eo bet kontet deomp gant ar skrivagner Yeun ar Gow, n'emañ ket war-nes koll hec'h anv c'hoazh. Met e pelec'h 'ta emañ ma soñj ganin ? Ichê ! Karlosket e vo pelloc'h ma chidourennad boultouz.

Ha Loeiza ha mont, tizh ganti, d'ober war-dro an eil meuz. An teuzer a oa gant ar pladad boultouz ken e lipe ar gouvidi o mouroù. Bez' e oant erru da fin ar pred, hag o kas bec'h d'ar wastell, dienn chokolad ha tout, bet fardet dezho gant mestrez an ti, pa gredas da Gaou Kemener ober ar c'hinnig-mañ d'ar re Riou :

— D'an dibenn-sizhun a zeu e vimp, Loeiza ha me, o kemer perzh e pardon ar Seizh Sant, ur chapel eus parrez ar C'houerc'had, e-kichen Plouared, un ugent kilometr ac'hann. Ma contr, ar Chaloni Tin Nedeleg, person ar C'houerc'had, eo a vez e penn ar jeu, evel Tad-pardoner, bep bloaz. Ha plijout a rafe deoc'h bezañ ganeomp ?

Lammat a reas Katell war ar c'hinnig. Met ginañ a reas, en ur astenn he mourrenn, kerkent ha ma klevas e oa eus pardon ar Seizh Sant ur pirc'hirinaj etrerelejiel ma veze bodet ennañ kristenien ha muzulmaned. Taolioù-feulster an islamisted a oa war he spered. E seizh gwellañ a reas Kaou evit asur dezhi ne oa riskl ebet, hag eñ displegañ e

oa bet aozet pardon ar Seizh Sant, graet anezhañ c'hoazh Emgavioù ar Seizh Sant, evit harpañ donedigezh ar peoc'h etre ar broioù hag o fobloù. Dre se eo e veze, da vare ar pardon, emgavioù etre pirc'hirined ha pennadurezhoù eus relijionoù disheñvel : beleg, Imam, rabbi ha reoù all c'hoazh. Mard e oa kaset Kaou di, war e vicher, ne oa nemet dre voazamant labour ar Polis, setu tout. Plijus-kenañ eo al lec'h ouzhpenn, war maezioù Bro-Dreger, war ribloù ar stêr Leger, dindan levezon an natur hag an hañv. Evit sachañ ar maout gantañ, e lâras Kaou c'hoazh e c'hellfe Loeiza, Katell ha Ronan, mont da enoriñ memor ar varzhez, Anjela Duval, betek Traoñ-an-Dour, e-lec'h ma vevas Anjela e parrez ar C'houerc'had.

— Petra eo da soñj dit-te, Ronan, a c'houlennas Kaou ?

— Mat eo din. Met, mar fell deomp chom da bardo-
nañ daou zevezh-pad, daoust hag-eñ ne vo ket ret deomp
kas teltlennoù ivez da dremen an noz war tirien porzh-
bered ar chapel, pe mont di gant ur c'harr-kampiñ ?

— Arabat bezañ trikamardet gant se. Ne vo ket dav
deomp kousket e porzh ar re varv peogwir e vo profet
deomp bod hag aoz gant ar Chaloni Nedeleg en e bresbital
bras.

Ur sell a daolas Kaou ouzh Katell.

— Perak pas, neuze, a lâras homañ, dre ma kavimp
war al lec'h leti ha preti evit ur bennozh Doue. Deuet eo
ar veleien da vezañ tud a-feson, me 'laka. Mall a zo ganin
klevout penaos eo bet lakaet ar pirc'hirinaj etrerelijiel-se
da gemer gwrizioù war maezioù don Bro-Dreger, da-
geñver ur pardon breton-rik ?

— War am eus klevet, Katell, ez eo bet savet diwar ur
vojenn relijiel kenlodet gant ar relijion gristen hag hini